

Rim flemus Boileau  
a enep ar Briedelez.

(453, suite)

Nan, certen, ne rim get ar pezh zo c'hoant a rafen,  
Hac e ven dirlevret eus va disterra cuchen;  
Ha ne chomfe ganén tra nemet va rochet;  
C'hoant zo d'am demezi; biqen ne ve gallet.

Va repos a garan muis evit heritach,  
Dre ze biqen eured ne velin sur em partach.  
Priedelez a zo hiam al liberte:  
An eurussa pried zo goal drêtet bemde.

Entre hymen ha joa zo re vras a gassoni;  
Hepqen eus daou deiz vad: an antre hag ar zorti;  
Ar pezh a zo ousten a zo harvet carad,  
Cant devez fall a zo evit un nozvez vad.

(454)

Ar brassa douçoni a heuil ar briedelez  
Ezeo ar sonch eureus demeus an intanvelez;  
Den fur er bed na dle gemeret e chaden,  
Nemet en esperanç e vo torret souden.

Penos! staquet atao deus ar memes femelen,  
Hep gallout dispega, ma na deu ar marv souden!  
Ha gortos an heur vad eus a gris tremenwan,  
Ha goelet nos ha deiz ar pezh na querer man.

Beva daou vil incres, ha mil rebeck en ene,  
Ha mervel a zispit m'e deus ur vreg hir bue;  
Me gar re va repos vit en em exposi  
D'an oll nec'hamanchou a heuil an demezi.

Contrat a zisplich din. Guelloc'h ve grêt an affer

- (455) Hep ar Conjungo vos ha barbouillach un noter ;  
Eur veach lavaret an drouc-eurus ia,  
Plijadurioù daou douz a zo et da netra.
- Credi a rër souden e ve qemen zo dleet ;  
An dezir zo brassoc'h eguet an dra difennet ;  
Pa chencher hano douz, en hini a bried,  
E coll ar garantez, e blijadur barfet.
- Evit beza caret ha dorlotet hep paouez,  
E renquer lavaret : va douz ; nonpas va maouez ;  
Geta ma rër al lez, gant joa en em veler,  
Carout a rër dre c'hoant, ha nonpas dre zever.
- Ar guer a legitim a zisplich din ar muia ;  
An hano a bried n'el get va satisfia :  
Quell eo ganen beva divar goust ar gommun,  
Eguet en em laqat dindan bec'h importun.
- (456) Evelse diana, e tistaguer pa guerer,  
Rac na voar get staguet dre chader, na dre golier :  
Ne voar get liamet dre gassais contract ;  
Dre se, pa ver dies, pepini ell quittat.
- Mar deus ar sy benac, e rër quella ma eller  
Epad ma rër al lez, evit miret n'er queler ;  
Mes goude an Eured en em disquez an den,  
Un arvien tromplis a ve neuze traou ven.
- Dont a rër negliget gant fin ar blavez genta ;  
Ur fourditizen gaer a deu souden da voera.  
Diaroc ne voa pleg en he oll quiscamant,  
Ar pez a zisquele un amoureux charmant.
- Ne frotte e zouarn nemet gant toaz amandez,  
E vleo voa parfumet dre c'houez mad bleun oranges ;  
Mes an hini ne voa nemet roz, fourditis,  
A flery evel ur boc'h elec'h ar goulars-gris.
- (457) Seblantout a ra caout tregont proces en e benn,  
Hac ur spered qer lemm a zo troet en arzen ;

358

Atao eo chaqrimet, distervet erit lod,  
Abasue m'en deus greg, eo deut da verza sot.

I've pa'r quemerer, e voar en risq da verza.....  
Ur pried er poent-se, allas! n'el difen netra.  
He c'halon a zo bêr da zistrei e drouc-heur,  
Ha mar boar discredus, sellit ous Levasseur.

En henvel a eller, e histor a zo patant,  
Disclêryet eo dogan dre arriët ar parlamant.  
Damis, ar memes tra, Colin zo e secret;  
O henvel amâ oll a vez amzer gollet.

Ret e ve din sevel betec ar c'henta crouet,  
Da c'hout ha dre 'r serpant ne voe get disenoret;  
Marteze e voe-hân, ha mar en achapas,  
An ober voa êzet, ha nebeut a vargas.

N'en deo get ret gouzout pe'ñ voe tapet pe ne voa,  
Rac erit ma na voe, certen ec'h alle beza:  
Mes me, re epizidic, var poet [?] gen pirillus,  
Bigen ne dremenin dreist ar planqen rischus.

(458)

Respont.

Gement a glêver amâ, certen a zo farcerez,  
Rac me zo bet teir quech dinec'h en briedelez.  
Assuri ran ouспен: hini eus va graques  
D'am dogani ur vech ne deus bet bolontez.

Mes ne supposit get e ven hirio o farçal;  
C'houi oll, tud discrediq, deut da vizita va zal:  
Sellit, furchit, clasqit, tastonit dindan dorn,  
Da c'hout ha c'houi gavo merq an disterra corn.

Goude enclascou vên, e leverot assambles,  
Ne dleye get Boileau drouc-comz eus an oll graques;  
Rac ha demeus a deir ne zeut get bet unan  
E devije c'hoantët beza greg d'un dogan

fin.

F. Guenneur, oaget a 80 vloas.

(Vol. III, p. 453-458.)

(19 str. numérotées.)

Respont: 3 str. numérotées 1 à 3.)